

19° Couplet

Brema ar République en devez ordrenet
Ma vije exersset an ol citoyenet
Deus eur b'a varnuguent betek anter cant vla
Vit ober excersis beb sul da neubeuta.

20° Couplet

Deus ar gard sédenter zo bet dispartiet
Betec daou-uguent vla ar gard mobiliset
Da bartial ive evel ar re quenta
A quitat deus ho bro vit difen ar vroma

21° Couplet

Guelet ar gard mobil quitat deus o bro
A zo bet evidomp ive eur quelou
Mes guelet tut yoanc e voa bet exantet
O quimiadi diouzomp zo tristoh da velet

22° Couplet

Dre oll dre ar Franç eo fall ar homerçou
Netra na honezer evite bale ar vro
Ac ar paour ques merer gant e gomananchou
Penos hello ober evit pea e fermou

23° Couplet

Partiet e vugale hac e dut eus ar guer
Ar loenet marhat mad na netra na verzer
Amzer a dristigues évit ar baysantet
Biscoas eur sort amzer ni devez guelet

24° Couplet

Pedomp ni biétonet pedomp evit er bro
Hac evit ar zoudardet zo dindan an armo
Ac ar re zo er Pruss evel prisonerrien
Faminet gant an naon ha gant ar yeinen

25° Couplet

An hici neus composet ar récit a neve
A zo anavezet bars en meur a gontré
En devez hi rimet dan de divezo deus ar bla
Pa voa an nerh var an doar amzer avoalh en devoa

26° Couplet

Ar pez a zéziran er fin va hanaeoun
Ma vezo ar victoar evit ar Francijen
Ila pa vezo en peoh hac en tranquillite
Den nem rejouissa an ed gant éguile


27° Couplet

Mar deoh gout hanon ar hompozer
Ganet eo e Loqueffret ha mab deur miliner
E ano François Rolland var cayerou e vro
A pa sin e hunan Rolland eo e ano

28° Couplet

A zo bet er studi er Ploermel ive
En amzer ze voa Franç barz en tranquillité
Ila pa zeo distroet neus disket eur vicher
Anézau e hunan beza horolacher.

Propriété : GUILLERMIC.



CHANSON NEVEZ

Composet voar sujet ar haffé

Var un ton ancien

1° Couplet

Tostait oll tud yoanc da glevet eur chanson
Zo composet er blama gant sujet a reson
An évérézet Café trac an éferrien guin
O deus gret quemen-ma da laqat da horzin.

2° Couplet

Ar guin zo eur liqueur zo formet gant Doué
Hac voa bet transplantet gant hon tad coñ Noé
Non pas vel ar haffé zo un dro invantet
Gant eur vreg malicius eus ar vro an turquet.

3° Couplet

Quenta ma teuas biscoas dar vroma ar haffé
Ne voa nemet an noblans guément a évé
Ila bréma an oll gomun a ya tout da éva
An darn voya anezo no deus quet a vara.

4° Couplet

Bréma me a ziselerio ébarz en abréré
Ar chanson ma composet var sujet ar haffé
Etré daou den démézet nem reprochai
Unan balamour dar guin hac un al dar haffé.



5° Couplet

Ebarz er blaves mit eiz cant pemzoc a pévar uguen,
E savas fachiri goudai gouel a oll zent
Ar vreg a yeas en quer gant eur boezellat ed
Hac a foétas e arhant gant e homérézet.

6° Couplet

Pa antréas er hafé e deus bet lavaret
Me gred évit on arhant e vezimp servichet
Digassit demp-ni café hac ive odevi
Hac eur voutaillad liqueur vit nem régali.

7° Couplet

Ar liqueur an odeur a savas en o fenn
Ma comansjont da zansal o fédér diarhen
Plah an hed a lavaras ma arhant zo foetet
Me a éfé eur bané rac hoas em eus séhet.

8° Couplet

An teir all lavaras neuzaï abouez o fen
Ret eo goélet ma homer peguement ar séoden
An hostises pa glêvas dan eh zo pignet
Pa voe aranjet ar gont e chomé hoas our scoet

9° Couplet

An hostises a laras me meus roet da éva
Ac abars ma sortifot hui ranco va féa
Rac-se en em aranjet da bea o scoden
Evidon me a bromet ne po quet a dermen.

10° Couplet

Ar merhet en em selle hac o devoa poan ben
Rac no devoa queta arhant da bea o scoden
Jacquéta a laras me rey ma davancher
Ha te ma homer Jannet a rey da vouchouer.

11° Couplet

Unin demeure an ézih en deveus bet cavet
He devoa foetet e vreg ar som a bévar scoet
Quittat a ras e labour évit donet en quer
Ebarz e ty ar hafé o havas o fédér.

12° Couplet

Hac ével ma hantréas en deveus lavaret
Ha ne heus tai qet a vez lavar greg débordet
Lézel eur buguel bian déomp ni da rusbuellas
An deirvet nos eo onman nem eus cousqet bérat.

13° Couplet

Aze ama em hichen ha ro péoh émézi
Quemer un tassat café da drémen da anui
Tao din gant da zour bervet avoalh e heus évet
Qenta bané a évi me garé vez crevet.

14° Couplet

Evidont-te sah ar guin te vépris ar hafé
Ebarz en hostaliri e vez cavet nos dé
An arhant a honéas étro pal ar zun
Ne zeus quet re ané da gavet guin a butun

15° Couplet

Janicoten emezan brema ni ray ar hal
Goudai foetta ma danvez donet dam haquéta
Dre brontitud eur vazat a roas dar vreg qes
Ma tiscaras d'an doar café dien a les.

16° Couplet

Ar merhet a laras o fédér assembles
Maquet oh eus ma mignon vont da squéï o moés
Squilliet oh eus ar hafé hui a reng béa
Pe bréma souden vaian ni ya do tisvléva.

17° Couplet

Ar péder blah animet a saillas varnézan
Hac an hostises ivé évit e zivléva
Treinet voé dré an ti e zillat voé roguet
Hac e vreh bétéc e scoa gant ar hafé grillé.

18° Couplet

Evel ma halas achap e commans rédet
Eur sellet var e lerb evel eur has fouélet
Darbet ai din émézan cazi col ma bué
Me garfé e ve beuzet ar merhet er hafé.

19° Couplet

Etrézoh goaset yaonc dioualit o cragué
Pa sint da verza aman na safen dar hafé
Ar hafé zo débohus dre ma za mad a dous
Hac a ro tentasion dan ol merhet lipous.

20° Couplet

Dré zé oh avertissan ezah eus ar hontré
Ni quet de glasq ho cragué ispical dar hafé
Mar ho p-us guers boutaillad barz ho codel
Querzit dan hostaliri da velet yan vourdel.

21° Couplet

Pa ven en hostaliri gant ma hamaradet
Eur podat guin en hichen ve contant va spéret
Arça éta mignonet evomp peb a vanai
Ha canomp oll eur chanson var sujet ar hafé.

22° Couplet

Ar hafé a ra domach eharz en peb canton
A ma dê qer an aman ne dê qet heb rézon
An dien a ya ema peb guella eus ar les
Ha ni entrézomp goaset a sébr or bara séh.

53° Couplet

Ni peurvuya canerien a vépris ar hafé
Ze zo eos ma reprenomp a merhet a graqué
Ar guin par er hémérer gant modération
A ro courach deur haner da gana eur chanson.

24° Couplet

Poent e cavan finissan amplie em eus comset
Efit ar seurt a guerfet mé né sourcian qet
Efit guin éfit café liqueur pe odevi
Mes dioualit absolu da gavet fachiri.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC.